

KANTIK

EN ENOR DA SANT JILI.

*Pihini an deuz ar chapel devot é parrès
Ar Zent, etre ar Zent, ar Faouët,
Guiscriff, ha Lanvenegen:
Ar pardon bras zo ar c'henta-zul a viz
Guengolo*

VAR DON : *Santes Anna, ô Mam dener.*

1 Zentis, ha c'hui, pelerined.
Ni oll zo ar plas-ma bodet,
Pedomp hirio gant karanté
Sant Jili, servijer Doué.

DISKAN : Saint Jili, tad karantezus
Tollet ar zell trugarezus
War ho pugalé daoulinet
Endro d'ho chapel benniguet.

2 Ganet euz al lignez uhel
: Gant an tad hag ar vam santel
Hen a zeskas dré ho buez
Kaëra kenteliou a furnez.

3 Iouankik-flam ar c'hrourdur
A gave brassa plijadur
O rei bemdez an aluzen
Evit konforti ar beorien.

- 4 Maro he guerent arog pell.
O chilaou d'eoc'h an Avel,
Hen a wersas he oll vadou
Da essât pep soit ezomou.
- 5 Ha goude war ar vatimant
E teu da guitaat dizamant
Athèn he vro muic'ha karet
Gant ar zonjda veza parfet.
- 6 An avel a c'huev gant fulor,
Ema al lestr da zôn ar mor :
Kerkent Jili a ra peden
Hag an tempest a dav souden
- 7 Digouet a ra bars ar Provanz
Kartel pinvidik euz ar Franz;
Gant arc'heskop Arl' sant Cezaer
Hen a chom hed daou vloas amzér.
- 8 P'en deuz echuet he studi,
Evit n'em rei oll da bedi
Ebarz ar c'hoat pell euz ar bed
Neuze hen an deuz n'em dennet,
- 9 Maes ar vrud euz he vertuziou
Kerkouls hag euz he viraklou
A ra d'an oll gouzout timad
He zemeurans ebars ar c'hoat.
- 10 Endro d'han na glew ken bemdez
Nemet meuli he zantelez :
Raktal ar zervijer Doue
A grenn'vit he humilite.
- 11 Mont a reas da glask al lec'h-all
E kreis ar c'hoad don ha tenval
Kuzet euz oll safar ar bed
Hag he follentez milliguet.

- 12 Ar c'havarnik a gav eno
Spenn-gwen hag wez bras en he dro,
Ha tostik-tost ar wazik-dour
O hiboudi gant he mouez flour.
- 13 Eno an hermit gant furnez
A dremen bemdez he vuez,
O labouiat 'vit an envou
Dré ar rusta pinigennou.
- 14 Kalon ha spered d'ar beden
Na zouj morse poan nag anken
He yevanz zo griziad goular,
Bemmoz é kousk war an douar.
- 15 Maes klevit ar burzud nevez
An deuz gret evit han Doue:
An heiez dezan digasset
Gant he lez a dor he zec'hed.
- 16 Childebert, roué deuz ar Franz,
An devez, teu gant he noblans
Da chasseal tost d'ar c'hoad-ze
Lech a veve mignon Doue.
- 17 Hen a well heiez sant Jili
Hag en em lak d'he foursui;
Hi, gant ar spont oll stravaillet
D'ar c'havarn a zo diredet.
- 18 E treid he imestr en eur grenn
Hé en em doll da c'hourveza :
Pa well dirazan kement-ze
E chom souezet ar Roue.
- 19 Maes brassoch c'hoaz eo he eston
O klevet é pe seurt tesson
E temen Jili he vuez
Ebarz an desert-ze ken gouez.

- 20 Kinnig a ra d'han presanchou !
 Hé-ma na c'houl ket tenzoriou,
 Maes hepken ma vezo savet
 Er gouent evit menac'het.
- 21 Buhan an ti santel zo gret,
 Hag eleiz a religiuzet
 Erruet a bep tu timad
 A choaj Jili 'vit ho Abad.
- 22 Ar garg-ze e varvas arzant
 Tost vardro d'ar bloavez c'huerch kant,
 Gant Doue hag an devoa karet
 Ema euruz evit beprei.
- 23 Deskonp oll digant sant Jili
 Euz peadra n'em gontanti,
 Mintin ha noz rei trugarez
 Da Zoue, 'vit he vadelez.
- 24 An draonien-ma leun a zaelou
 N'o beuz' met poan ha trubuillou
 Bezomp patient d'ho zouten
 Hag hé a vo hor pinigen.
- 25 Gouiomp pedi e pep amzer,
 Ar beden a rai deomp sklerder
 Evit gounid d'hon eneou
 Rouantelez kaer an envou.

Permis d'imprimer

Vannes, le 26 février 1881.

LE GUYADER, *Vic. gén.*